


8N1-3-054

KANTIK

ITRON VARIA KERINEK

E PARREZ POUILLAN



WAR DON : *Itron Varia Rumengol.*

Diskan :

*Itron Varia Kerinek,
Savit ho torn ken galloudek,
Da venniga ho pugale
Euz an Arvor hag ar Mene !*

1. E Kerinek, parrez Poullan,
E kaver eur chapel vian,
Bet savet gant hon tadou koz
D'eoc'h, Rouanez ar Baradoz !
2. Parrez Poullan a bep amzer
Ho karaz stard, Mam hor Zalver ;
C'houi, Mari, evel eur vam vad,
A garaz Poullaniz dalc'hmad . . .
3. Ar poanier paour, war hor meaziou,
'Vit kaout kalon en e boaniou,
War-zu an Nenv a dro bemdez
Da c'houlenn ho pennoz, Gwerc'hez !
4. Al labourer, en e labour,
Gant Mari a c'houlenn sikour ;
Kerkent e tredit, Mam vad,
Da venniga e bark, e brad.

5. Pesketer Treboul aliez,
Dindan ar barr-amzer diez,
En e vâg, ho ped kalonek,
Gant fizians, Gwerc'hez Kerinek :
6. « Intron Varia Kerinek,
Va diwallit ouz ar c'herrek ! »...
Buan, Gwerc'hez, ho mouez garet
A c'hourdrouz ar mór kounnaret.
7. Da Gerinek, laouen; séder,
Poullaniz a red gant douzder ;
Hor poaniou, Gwerc'hez, a dec'h pell
Pa dostaomp ouz ho Chapel...
8. Da Gerinek omp deut hirio,
Mari, da veuli hoc'h bano ;
Ha da c'houlenn ho pennoziou
Evit hon tud hag hor meaziou.
9. Mari, refuch ar bec'herien,
Bennigit ho pardonerien :
Ha roit d'eomp ar grasou nerzuz
A red euz kalon Mam Jezuz !
10. Hirio, Mam dener, hep dale
Klevit peden ho pugale :
Mirit d'hor Bro-tenzor ar Feiz !
Diwallit Bro-C'hall hag hor Breiz !
11. Mirit bepred ar feiz gristen
Griziennet e kalon pep den,
Ha grit ma talc'ho Poullaniz
Da startât bemdez en o feiz !
12. Diwallit mad parrez Poullan !
Koz ha yaouank, braz ha bian,
Oll en em westlomp d'eoc'h hirio
Betek an heur euz hor maro !

13. Evel eul labousik d'e neiz,
E tiredomp aman gand feiz ;
Rag Kerinek, c'houi vo bepred
Hon neizik tra ma vimp er bed !
14. Keit vo kerrek war hon aochou
Ha dero krenv en hor c'hoajou,
Poullaniz ho meulo, Gwerc'hez,
E Kerinek gant karantez !
15. Ha pa zigouezo ar maro,
Gant fizians ni a lavaro :
« Deut omp betek dor ar Vuez,
Digorit d'eomp an Nenv, Gwerc'hez !
16. « Gwerc'hez, digorit dizale,
Emomp aman ho pugale !
Mam garet, emomp o c'hortoz
Pignat ganeoc'h d'ar Baradoz !

*Pardon Kerinek a zigouez bep bloaz d'an trede
sulvez a viz gouere ; oferennet e vez er chapel ;
bemdez, epad an eizved varlerc'h ar pardon, d'al
Lun-Fask, ha da Lun-ar-Pantekost.*

IMPRIMATUR

Quimper, le 31 Mai 1906.

ERM. FLEITES, Vic. gén.